

## **Proux-Ar Skourr**

**Proux** (Poullaouen 1811 – Montroulez 1873). Ar Skourr (Hañveg 1811 – Montroulez) 1870).

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

### **D'am mignon koz Yann-Pipi-Mari Ar Skourr Barz an Itron Varia Remengol**

War don : *Gralon ha kêr-Iz*

#### I

Barz Remengol, tad ar Varzed,  
Aliez din 'h-eus lavaret :  
« Deus 'ta, dihun, paotr lemm Kerne !  
Dispak deom eru zonig neve' ;

Eur zon ebatuz ha lirzin  
Da lakaad Breiziz da hoarzin ;  
Da lakaad Breiziz da dridal,  
Da fringal ha da hourena. »

#### II

Nann ! paotr Kerne ne rimo ken,  
Tougnnet ez eo beg e bluenn,  
En e spered n'eus mui a dan,  
En e skevent n'eus mui alan.

E zah biniou a zo roget ;  
E goz vombard a zo faoutet,  
N'eo ket siwaz ! mouzad a ra  
He sutell 'zo eet da netra.

Barzed yaouank, a beb avel  
A gan bremañ dre Vreiz-Izel :  
Pa richan an eostik er vodenn,  
Teh ha kloz da veg, koz kaouenn !!!

**Proux**